



En français à la suite

Landerne, d'ar 24/06/2021

Diwan aterset evit ar gefridi Castex : interest, goulennoù ha nec'hamantoù

Evel raktreset e oa bet dileuridi Diwan aterset gant ar gannaded Yannick Kerlogot ha Christophe Euzet d'ar Merc'her 23 a viz Even.

Merzet hon eus e kaskont suraat dazont an hentennoù war verr ha krenn dermen met gwall strizh eo an hent evit se.

Padal, souezhet-tre omp n'en deus ket ministr an Desdadurezh Stad roet an titouroù ret en un daore splann evit kaout evel se un dielfennadur fetis eus hon hentenn. N'o deus ket gelllet ar gannaded na studiañ danevelloù ar bennensellerien, en o zouez an hini diwezhañ savet gant an aotrou Bernabé e 2019, na studiañ roadennoù stadegel ha sokial hor skolioù. Kement-mañ a ziskouez soñjoù ministr an Deskadurezh Stad hag a zlefe kentoc'h sikour ar gefridi aozet gant ar c'hentañ Ministr.

Gortoz a raemp un tamm habaskted, siwazh n'eus sin ebet eus se.

- **N'eo ket kevratet hor skol e Sant-Ervlan**, daoust bezañ goulennet meur a wech an dra-mañ, lizhiri kannad-ed-ezed hag ur vanifestadeg, ne seblant ket ar minister prest da respont d'hor goulenn.
- **Kudenn evit reiñ ar skodennoù skol** : war-lerc'h diviz ar c'huzul vonreizh ez eus bet kaset respontoù negativel d'ar skolioù gant tiez-kêr zo oc'h implij an arguzenn-mañ. Ouzhpenn se, ne lak ket e pleustr prefetioù zo an tredeogezhioù ret pa emamp gant an degouezh-mañ. Ar fed bezañ dizoberiant evel se a lak diaes ar skolioù e-keñver an arc'hant, setu efedoù trumm an diviz-mañ.
- **Raktres programm evit ar skol-vamm** : implijet vez ar ger « yezh » e lec'h « lavar ». Dibabet eo bet se evit **kreñvaat anaouedegezh ar galleg nemetken**. Mat eo gouzout emañ Alain Bentolila e touez ar re o deus kinniget ar c'hemm-mañ. Henezh a zisklerie er JDD : « *les langues régionales à l'école, un combat inutile et douteux* ».

D'ar poent-se, n'eus nemet reizhañ ar vonreizh a c'hellfe suraat ar soubidigezh er skolioù kevredigezhel kevratet !

A hent all hon eus eskemmet gant kannaded ar gefridi Castex diwar-benn komzoù ar ministr kentañ da geñver ar goulennoù d'ar gouarnamant a-zivout ar gallusted a vefe roet d'ar strollegezhioù lec'hel reiñ yalc'hadoù postadur. Ar c'homzoù-se a ra anv eus ar c'hudennoù savadurioù a zo diouto ingal er rouedadoù kevredigezhel dre soubidigezh.

Daoust hag-eñ e vo digoret un hent war muioc'h a frankiz ha muioc'h a zigreizennañ evit a sell ouzh kelenn ar yezhoù rannvro hag evit ar peadra da vezañ lakaet e pleustr ? Hag ar raktres lezenn anvet 4D a c'hellfe bezañ un digarez da vont pelloc'h ganti ?

Gant an degouezh-mañ ha da vare ar choazoù diwezhañ e fell deomp kaout sklaeridurioù gant an dud war ar renk evit an dilennadeg rannvro ha departamant :

- **Daoust hag-eñ e harpint goulenn reizhañ ar vonreizh evit ma vo suraet kelenn ar yezhoù rannvro, ar frankiz pedagogel hag implij ar sinoù diakritek ?**
- **Ha pa vefe ezhomm, daoust hag an dilennidi nevez a c'houlennno bezañ war ar barregezhioù-mañ o enluskañ peadra da zerc'hel ha da ziorren ar c'helenn dre soubidigezh ?**

* * *

Landerneau, le 24/06/2021

Audition de Diwan par la mission Castex : de l'intérêt, des interrogations et des inquiétudes

Comme prévu, le réseau Diwan a été auditionné ce mercredi 23 juin par les députés Yannick Kerlogot et Christophe Euzet.

Nous avons pu constater une volonté de sécurisation à court et moyen termes des filières mais les marges de manœuvre semblent assez réduites.

Nous sommes très surpris.e.s que le ministre de l'éducation nationale, dans un souci de transparence, n'ait pas fourni les informations nécessaires à une analyse objective de notre modèle. Les députés n'ont pas eu accès aux rapports des inspecteurs généraux, dont le dernier en date est celui de Monsieur Bernabé en 2019, et n'ont pas eu accès aux données statistiques et sociales de nos établissements. Ceci montre le parti pris du ministre de l'éducation nationale qui devait être en appui de la mission organisée par le premier ministre.

Nous attendions un peu d'apaisement mais malheureusement, les signes ne sont pas là !

- **Pas de contractualisation de notre école de Saint Herblain** : malgré plusieurs relances de notre part, les courriers des élu.e.s et une manifestation, le ministère ne semble pas vouloir donner suite à notre demande.

- **Problème de versement des forfaits scolaires** : suite à la décision du conseil constitutionnel, des écoles ont reçu des réponses de certaines mairies qui refusent le versement en utilisant cet argument. De plus, des préfetures ne mettent pas en œuvre les arbitrages nécessaires compte tenu du contexte. Cet immobilisme génère, pour certaines écoles, une souffrance financière qui témoigne des effets immédiats de cette décision.
- **Projet de programme pour l'école maternelle** : au terme langage est substitué le terme de "langue", ce choix correspond à la volonté de **renforcer uniquement la connaissance du français**. Il est à noter que l'un des inspirateurs de cette modification est Alain Bentolila, celui-là même qui déclarait dans le JDD *"les langues régionales à l'école, un combat inutile et douteux"*.

A ce stade, seule une révision constitutionnelle permettrait de sécuriser l'immersion au sein des écoles associatives sous contrat !

Par ailleurs, nous avons échangé avec les députés de la mission Castex sur les propos du premier ministre lors des questions au gouvernement concernant la possibilité qui serait donnée aux collectivités d'accorder des subventions d'investissement. Ces propos font notamment écho aux problèmes récurrents des locaux pour nos réseaux associatifs immersifs.

Cela ouvre-t-il la voie à une réflexion vers plus de liberté et de décentralisation sur l'enseignement des langues régionales et les moyens alloués ? Le projet de loi dit 4D pourrait-il être une opportunité pour avancer sur le sujet ?

Compte-tenu du contexte et à l'heure des derniers choix, nous souhaitons obtenir des éclaircissements de la part des candidat.e.s aux élections régionales et départementales :

- **Les futur.e.s élu.e.s soutiendront-ils la demande de révision de la constitution pour sécuriser l'enseignement des langues régionales, la liberté pédagogique et l'usage des signes diacritiques ?**
- **Si nécessaire, les futur.e.s élu.e.s demanderont-ils d'exercer cette compétence en mobilisant les moyens suffisants pour préserver et développer l'enseignement par immersion ?**